

Kenurzhier-ez Radio Naoned

Pal ar post :

Krouiñ ha merañ ur radio e brezhoneg e Naoned

Misionoù :

Prientiñ ar staliañ RND e Naoned asambles gant skipailh Radio Kerne

Da heul :

- kenurzhiañ ar radio nevez e Naoned (teknik, melestradur, kenlabourerien, kehentiñ...)
- fardañ abadennoù radio, animañ atalieroù radio

Hierarkiezh :

An den vo dindan urzhioù kuzul merañ Radio Kerne dre Lou Millour ha Morgane Bramoullé, renerezed.

Karget vo an den da verañ da c'houde : tud en servij keodedel, tud a youl vat ha marteze implijidi all.

Perzhioù ispisial ar post :

Eurioù noz ha /pe dibenn-sizhun

Labour da gentañ e Ploneiz (un nebeut mizioù) ha da c'houde e Naoned

Barregezhioù goulennet :

Skiant prenet er sevel raktresoù

Gouzout merañ tud

Siriusted

Barrek tre war an aozañ

Barrek war an urzhiataerezh

En e/he aes gant an dud (bugale, tud deuet)

Brezhoneg brav

Intrudu

Bezañ emren (labour e/he unan)

Barregezhioù ouzhpenn deuet mat :

Gouzout eus micherioù ar radio

Spered kazetenniñ

Barrek war ar c'hehentiñ (meziantoù graferezh, community managing)

CDD 1 bloaz a c'hello dont da vezañ ur CDI

Post leun amzer. Gopr diwar gael ar « radiodiffusion ». Kregiñ : an abretañ posubl

CV ha lizher emginnig da gas da Lou Millour, lou@radiokerne.com a-raok ar 16 a viz Meurzh